



# CHANSON

311 B

## AR C'HOMERESET.

Var ton : *Chanson ar c'haffe.*

C'hoant am effe mignonet da lacaat ma speret  
Dont da gompozi eur son var ar c'homerezet  
Pere, gant ho c'huiguou aman, hac iveau gant ho guin,  
Abars ma vez o achu, ho lacao da choarzin.

Querquent à ma clew Janet ema clan e c'hommer,  
A lac eun davancher fresq, ha guemer e mouchouer;  
Roët eur vall din, emezi, ha boutailou gachet,  
Ma c'hommer Mari zo clan, mont aran d'e guelet.

Pe d'eus guisqeet e dillat ha nac'henet e fenn  
Gant eur vall fresq var e scoa, eur voutail e peb penn,  
Yanic, me a ya bre-mâ da velet ma chomer,  
Na ouzon pedavare a teuin en dro da guer.

O vont en hent gant e mall a rencontr eur vaoues;  
Pelech a ya ma c'hommer gant quement a brez?  
Chit, goustadic emezi, ha noc'h eus quet clevet  
Crouadur ma c'hommer Mari zo dija badezet?

Pa ve digouet bars ar vorc'h na ya quet d'an Ilis,  
A ya ar gomer Janet mez da dy an hostis,  
Bonjour deoc'h-hu hostizes, savet deus bo cuele,  
Roët guin ha audi vi din ar c'henta qualite.

Ped heur a alfe beza a vez o respontet?  
Ni a voa tout consquet mad en ty pa s'oc'h entreet,  
Ni hon eus bet tud fennos oc'h eva boutaillad  
Ha betec teir heur anter n'on eus cœusket berad.

N'eus quet c'hoas pell an horrolaičh o son e meus clevet  
Pemp heur mar am eus contet mad a oue neuze sonnet ;  
Ped heur eo bre-mâ da just ? N'ousen lavaret deoc'h ,  
C'houec'h heur pe c'houec'h heur anter n'all quet beza muioe'h.

Neuze ractal an hostis a command d'e bryed  
Sevel pront da c'huesa tan evit ar gomer Janet ;  
D'eus ar mintin , emezan , an amzer a ve ien  
Ha mar chomm pell en e flaç a paquo yenigen.

An hostises Annaic goude eur bater ber  
A guemer plous ha queneud ha ra tan de c'homer :  
Tostait , ma c'homer Janet , tostait d'ober enn tom ,  
Me a ya da glasq audivi a raï vad d'ho calon.

Ur voutaillad audivi var an doll preparet ,  
Hac evit an diou gomer bars ar guer disquennet ;  
Da yec'het bremâ comer iveau d'am-hini-me  
Ha da yec'het ar gomer so clan var e guele.

Comper , a lavar Janet , savet var ho caon-ze ,  
Ha d'eus an audivi-mâ quemeret ur bane ;  
Ho taoulagad so picous hac ho calon carguet ,  
Mes gant ur lamp d'eus he-mâ en em gavit carzet.

Mil bennos , comer Janet , quemeret ho gueren ,  
Me ya bremâ da sevel d'ens va guele souden ;  
Anna , preparet pesquet ma yamp da zijuni  
Assambles gant ar gomer evit e audivi.

Veza quet c'hoas an aman barz ar baelen teuzet ,  
Ma tigoue bars an ty ur vandennat merc'het ,  
Bonjour deoc'h comer Anna , ha deoc'h comer Janet ,  
Pelso a zo dija n'hor boa quet ho cuelet.

Digacet deomp-ni guin guen hac iveau audivi  
Ha pe ba guinamvet vit ar gomer Mari ;  
Clevet em eus e meas clan , mi a ya de guele ,  
Deut ives comer Anna ha c'hui comer Janet .

Gortait comerezet , ni a ya da zijuni ,  
C'huï guemero un tam boet assambles ganeomp-ni ,  
Ma ar voutaill var an daul , azeet en e c'hichen  
Evit ho comodite , chetu pep a veren.

Goude beza dijuniet hac eved ur banne ,  
Au evach pignet d'ho fri ho lac da veza gue ,  
Unan a c'houl boudaillad , goude un all de zro  
A la fin eguis drisqui a commançont cano.

Pa ves avancet an heur ha tostic da greis deis ,  
Abars ma yelon tout quit d'eus a dy an hostis ,  
Pebe guignic da danvat a vezd digacet ,  
An hani vrás ve quet prop mar bes dija bolc'het.

Ar c'huignou didan ho brec'h hac ho mall var ho scoa ,  
A yalo Perrinn , Janet hac ho c'hommer Anna ;  
Erfin ar c'homerezet a guitan tout an ty  
Evit cass ho fresanchou da ho c'hommer Mari.

Eguis bagou var ar mor , poulzet gant an avel ,  
A ya aveichou d'antu , aveichou d'an tu all ,  
A guers ar c'homerezet d'eus an eil tu d'eguile ,  
Unan anezo ho d'eus poan e vale.

Pa vent avancet en hent bras , ur c'horinic distro ,  
Assa a lavar an eil da heben anezo ,  
Ma c'halon a vauquo din , me a zo vén quenquen ,  
Ur banne so necesser da drempa ma c'hanchen .

Ya sur a laveront-hi tout , dre ur voez netize ,  
Tennoomp ar bontou ar mez , evomp peb a vane ,  
Ni a lacoomp dour e plaç , vezd nemet scleroc'h ,  
Nicun na ouio netra cave vezd guelloc'h .

Ur malheur bras so digouet gant unan anezo  
Epäd ma edo en hent occupet o cano ,  
Ar bontou deut ar meas , ar guin o voa scuillet  
Pa voa deut da glasq eva na voa mui bannac'h ebet .

Pa vent digouet bars ar guer hac antreet en ty,  
Bonjour tout compagnunes , hac ar gomer Mari ,  
Penos a ra hi brema hac an hini bian ?  
Expres evit ho guelet ezomp deut tout aman.

Bonjour deoc'h comerezet , a respontas Mari ,  
Gant plijadur ho cuelan deut assambles dahn sy ,  
Me an em gaf passablic ha cazac pare .  
Ar pan a zo yac'h , dispos a drugare Doue .

Abars lacat ar c'huignou hac ar guin en arbel ,  
A ya ar c'homerezet da gavout ar c'havel ;  
Pebe bocq dar pouponic tro ha tro a ve roet  
Aça tao , heman de dad a zo ar guir boltret .

Var an daul preparet prop a lacont ho c'huignou  
Pep hini demeus e mal a den he boutaillou ,  
Hac ha zistang anezo gant beguic ar gontall  
Da velet pe seurt guin eo , en a zo mad pe fall .

Ur bane demeus ar guin , demens an audivi ,  
Un tammic demeus ar guign a vez roet da Vari ;  
Tanvet , ma c'hommer Mari , tanvet anezo tout  
Ha c'hui a lavaro deomp hac he so mad do coud .

Ma assur int'emezi , qen douç evel ar mel ,  
An audivi hac ar guin , zo deut eus a Vourdel ;  
Gant ar c'haera deus ar bleud a oa gret ar c'huignou ,  
An tam , eguis aman fresq , a deus en em guenou .

Mæs avancet d'eus an daul , azeet en ho coa-ze ,  
Hac a bars ober ho poed cvet peb a vane ,  
C'hui a zo bet e querzat , a zo gleb o c'huezzi ,  
Quemeret , da doma d'eoc'h pe guin pe audivi .

Po d'eus debet ho souben hac evet ur lempad  
A tigacer c'hoas goude un tam quic var ar plad ,  
Ar ragout loue da lipad , crampoies , viou frittet ,  
Avalou douar en aman , bara gueut ha pesquet .

Equis ur c'hy chasseour , Jerom , pryd Mari ,  
Presset , a red da glasq chist , a zeu en dro dan ty ;  
E vleo clous didan e dog var vanchou e rohet ,  
Chetu chist mad , emezan , evet comereset .

Ar c'hic sal , ar ragout loue , hac an oll draou fritet ,  
A zizec'h ho c'hanchenou , a den dezo sec'het ,  
Dre fors eva chist , ha guin hac iveau audivi ;  
Pa ves quistion da sevel no deus troad ebed mi .

Pa vez squis Yanic , pelloc'h oc'h hortos e vaouez ,  
Pa zeu da glasq nei da guer oc'h he guelet mevez ,  
Petric tanfouel , emezan , aze moc'h lichouren ,  
Brema souden c'hui santo ar poez eus ma guialen .

Un devez teir badiziant er vorc'h ma a voa groet  
Ar c'homerezet gant joa dan davarn a voa et  
A lacas ar vugale en ur guele ho zri  
Epad ma voant assambles oc'h en em regali .

Po devoa debet frico herves m'ar goulen ho boelou ,  
Evit guin hac audivi , ha bep seurt liqueriou ,  
An hostis Guillou , den fin , ha carguet a valis ,  
A lac c'hoas , e plaç ur pan , un dorz bara guinis .


Goude beza gret ar gont , ha peet tout ho gle ,  
A ya ar c'homerezet da glasq ho bugale ;  
Quitaat arezont an ty heb songeal e netra  
Diou a zougue daou grouadur un all un dorz bara .

Houman erfin a zeuas da boquet dar chronadur  
A voa estonet meurbet demeus an avantur ,  
Ma c'hommer baour , emezi , ma c'hommer Annaïc ,  
Ur malheur bras so digouet , hema zo maro mic .

Terrupla un avantur c'hoarvezet ur veich all  
Hed ar hent gand diou gomer mevez mic , mevez dall ,  
Pere en ur vont d'ar guer o devoa lezet ar pan  
Heb goudezo en ur foss e quichen ur bod lann .

Me o ped comperien , ha c'hui comerezet ,  
Pa zigaffet bugale da veza badezet  
Eve neubeutoc'h a vin iveau a audivi ,  
Querzet gant an hent d'ar guer , ha divlam avezi.

Cals o clevet ar son-ma , a facho marteze ,  
An den coupabl na gar que clevet ar virione .  
Mes clevet comerezet , ha c'hui comperien oll ,  
Sentit , ha bezit furoc'h pe c'hui yelo da goll .



## KANOUEN

VAR

**Eur hêlevad erruet gant daou den yaouank , er gær  
a Vontroules , da Verc'her al ludu.**

---

Var ton : *Kanouen an Denil.*

Mar prizez ma mignonet ,  
Eun nebeudik va c'hlevet ,  
Mar d'e mouskennet o min  
    Me o lako (*bis*)  
Mar d'ê mouskennet o min ,  
Me o lako da c'hoarzin .

Er gær eus a Vontroules ,  
Mestr , mevel , greg ha mates ,  
A chom , vel er c'herriou all ,  
    Epad tri de (*bis*)  
A chom , vel er c'herriou all ,  
    Epad tri de da zançal .

Pa ve échu an tri de,  
Ar paour kes sant Molarje,  
Var ar volz gant e gador,  
A ve tolet (*bis*)  
Var ar volz, gant e gador,  
A ve tolet douz er mor.

Eunan e ya , maro ,  
Varzu kastel an taro ;  
Mæs , darbet è er blos man  
Ma yage daou (*bis*)  
Mæs , darbet è er blos man  
Ma yaje daou all gantan.

Eun dimezel guisket kaér ,  
O réi brec'h de c'havalier ,  
A vranskelle en daou du ;  
Deves merc'her (*bis*)  
A vranskelle en daou du  
Deves merc'her all ludu.

Dougen a ré eur bonnet  
Brodet koant ha rubanet ;  
Beteg e chal a fonz guen  
E voa savet (*bis*)  
Beteg e chal a fonz guen  
E voa savet ar vouilien.

Eguile , gant e dog plat ,  
A voa eur potr dilikat ;  
E vragou guen , grêd eb gri ,  
A voa livet (*bis*)  
E vragou guen , grêd eb gri ,  
A voa livet gant ar pri.

Gant avel ben , var éon  
E yend varzu kai Leon ,  
Ha var o lerc'h o redek

Ouspen daou c'hant (*bis*)  
Ha vár o lerc'h o redek  
Ouspen daou c'hant mic'hiek.

Plijadur e voa klêvet  
An daou den yaouank masket  
Skuis ha raouliet o mouechou  
O regrial (*bis*)  
Skuis ha raouliet o mouechou  
O re grial : *Hou ! hou ! hou !*

Dre vord ar c'he e yéjont  
Ha prest goude e veljont  
Eun itron goant , dilikat  
En e frenest (*bis*)  
Eun itron goant , dilikat ,  
En e frenest o sellat ,

An dimezel dic'hizet  
E deus bi bet remerket ,  
Ha ractal , distro outi ,  
E saludas (*bis*)  
Ha ractal , distro outi ,  
E saludas anezi.

Beza e doe ar goal chanç  
D'ober re vras reveranc ,  
En eur réi e stouaden  
E ys er mor (*bis*)  
En eur réi e stouaden  
E ys er mor var e fen.

Dre ma voa stard ha fier  
Krog en brec'h e c'havalier  
E rankas ar paour kes den  
Ruillan ganti (*bis*)  
E rankas ar paour kes den  
Ruillal ganti en dour yen.

Daou den gentil hac eur vreg,  
A n'em lakas da redeg  
Evit kass dezo sikour

Ken mo dije (*bis*)  
Evit kass dezo sikour  
Ken m'o dij' eur c'hofat dour.

Ar mor a voa c'hoas huel ;  
Ar baoures kes dimezel,  
Gant poau vrás eus e chacha  
Zo bet tennet (*bis*)  
Gant poan vrás eus e chacha  
Zo bet tennet da genta.

Kasi er memeus amzer,  
An amourous kavalier  
Dre ma ne voa ket re véo  
Zo bet hisset (*bis*)  
Dre ma ne voa ket re véo  
Zo bet hisset dre e vléo.

Eun drue voa e velet  
Mezuz vel eur c'hog kannet ;  
O , emezan , va greg vad ,  
Prizet ganec'h (*bis*)  
O , emezan , va greg vad ,  
Prized ganec'h va c'huzad !

En eun ty madelezuz  
An daou baour kes maléyrus  
Gant tud vad zo bet kasset

Evit bea (*bis*)  
Gand tud mad zo bet kasset  
Evit bea divisket.

An ini yas da lemel  
E roben d'an dimezel ,  
Prestik goude a velas  
Penos ar plac'h (*bis*)  
Prestik goude a velas  
Penos ar plac'h voa eur goas.

Pa voant eus en diviska  
Ne rē ken nemert krena ;  
Kollet e zon , emezan .

Siouas ! mervel (*bis*)  
Kollet e zon , emezan ,  
Siouas ! mervel a rankan.

Laket voe keunet a spern  
Da ober eun tan ifern ;  
Kafe du ha chigoden

A rekouras (*bis*)  
Kafe du ba chigoden ,  
A rekouras an daou den.

Eneal , va dimezel ,  
Cetu aze eur guentel !  
Daoust a c'hui o po c'chant  
D'en eum vaski (*bis*)  
Daoust a c'hui o po c'chant  
D'en eum vasbi aben blos.

P. DERRIEN.